

NIVERENN 35  
MEURZ  
1974

# dihun

KAS AL LIZIRI

J.-C. BOZEC  
Hent Treouergat  
Gwipronvel  
29290 ST-RENAN

## ar brezhoneg hag an ortf

Aman n'hon eus ket soñj da gomz eus taol an FLB-ARB e Roc'h Tredudon, ken diaes all ma'z eo gouzout evit gwir petra a deuo war e lerc'h, evit pezh a sell ouzh emzalc'h ar Vretoned e-keñver an Emsav. A bep seurt sotonioù hon eus klevet dija, siwazh : e oa bet graet an taol gant Charlez ar Gall, da skouer... A-hend-all, lavaret ez eus bet ur bern traoù diwar-benn plas ar brezhoneg en ORTF. Pehini eo heman e gwirionez ?

Ur 16 eurvezh bennak a zo bet skignet warlene e brezhoneg gant ar skinwel. Pezh a ziskouez, eme pennoù bras an ORTF, e ra diouzh e wellan da rein o c'hoant d'ar vrezhonegerien. Ma ! Sellomp pisoc'h ouzh ar sifroù da welout hag en emañ ar gwir ganto.

Diwar 158 eurvezh 25 munutenn a vez skignet bep sizhun well-waz gant an 3 chadenn, n'eus nemet 15 munutenn 30 e brezhoneg, da lavarout eo, ur c'hementad dister-tre : 0,1 %. E Breizh a-bezh ez eus 20 % a vrezhonegerien. Ma vefe roet dezho o lod dereat e vefe ret skignañ 200 (daou c'hant) abadenenn a vent gant « Breiz o Veva » bep sizhun... Ma vefe roet pezh a vez roet hiziv an deiz d'ar gembraegerien, a zo bihanoc'h o niver eget hini ar vrezhonegerien moarvat, e vefe ret skignañ 50 « Breiz o Veva » bep sizhun. Pa soñjomp e sav klemm Kembreiz abalamour d'o abadennoù da vezañ beuzet gant ar saoznek !

Evit ar radio e vefe kavet kement-all.

Koulskoude, « brokusoc'h » eo bet an ORTF ouzh ar Vretoned eget ouzh or pep brasañ eus pobloù all ar Frans. Hervez sifroù embannet gant « Le Monde », diwar 9 eurvezh 26 munutenn e yezhoù « rannvroel » er radio bep sizhun, ez eus 2 eur hanter e brezhoneg : muioc'h hon eus eget Okitaniz (1 eurvezh 56) a zo 5 gwech niverusoc'h egedomp. Korsiz no deuz nemet ur c'hard eur, ha Katalaniz tri c'hard eur. Ar maout a ya gant Alzasiz (3 eurvezh) : 2 anezho a zo divyezhek avat, ha ret eo lavarout ouzhpenn e vez selaouet abadennoù skinwel an Alamagn gant



Lazhet an tele : festoù-noz adarre ?

(Sk. R. Laouenan)

ur bern tud en Alzas. Kementad abadennoù en euzkareg (un eurvezh) a zo an hini uhelañ e-kenver o niver : 8 gwech nebeutoc'h a euzkaregerien a zo eget a vrezhonegerien.

Roet ez eus bet muioc'h neuze d'ar vrezhonegerien ha d'an euzkaregerien (ma lezer a gostez kudenn Alzasiz, na c'hell ket bezañ kenveriet ouzh ar re all). Perak ?

Ne vez roet nemet d'ar re a c'houlenn ha war dachenn sevenadur ar « rannvroioù », gouarnamant Pariz ne ro nemet pa'z eo rediet d'hen ober.

## STAJOU AL LEUR NEVEZ E 1974

Setu pezh a ginnig Al Leur Nevez er bloaz-mañ d'ar vrezhonegerien. Da genta toud, evel just, e vez goulenet diganto, dreist oll m'o-doa desket ganeom d'ar gelenn d'ar re all. Er bloaz-mañ e vezo paet o staj d'ar gelennerien hag hanter-briz d'ar vonitourien, da lavarout eo danvez-kelennerien o teski ar vicher. N'eus ezomm da veza ezel euz Al Leur Nevez evid dond, stajou digor d'an oll eo ar re-mañ.

D'ar vrezhonegerien a-viannig c'hoant dezo deski lenn ha skriva brezoneg e kin-nigom eur hlaz dezo er staj oll-vrezoneg a vo ganeom e Kerne ar Menezioù e peder-ved sizunvez miz Gouere.

D'an oll : — ar staj m'emañ o paonez ober ano anezañ. Digor e vo da stajidi wella ar stajou e galleg ha dre vraz da gement den barreg pe damvarreg war ar brezoneg hag en devezo c'hoant dond. Estreged klas ar vrezhonegerien a-viannig hag eur hlaz « hlaz » a gentelioù e vezo gouestlet ar staj-man d'an darempredou stank gand tud ar vro.

Daou staj war ar maez, e Bro-Leon, e miz eost. Unan tro-dro Kastell Paol, e pemzekte kenta, egile tro-dro Lesneven en eil bemzekte ar miz. Enno ne vezo degemeret nemed tud gouest da zistripen brezoneg ha d'e gompren mad a-walh,

hag ouzhpenn-ze prest da labourad dichipod gand o daouarnou, merhed ha paotred. Kentelioù brezoneg a vez graet ive eno ha da noz ez eus eun nebeut preze-gennou brezoneg. Evid tud yaouank ar rannvro a gompren hep kaozeal re vad eo graet ar stajou-man ivez. An daou staj a heller da ober an eil goude egile.

Evid an oll stajou-mañ e vefe mad deoh goulenñ ar henta' r gwella trakt an hini pe ar re a blijo deoh, gand eur fichenn enskriva.

Skriva war-eeun da :

Ao. Ollivier  
Glazvezenn Lividig  
29238 Brignogan

An traktou a vezo kaset deoh pa vezint prest, an abreta posubl evel just ha forz penaoz miz araog deiz kenta ar staj d'an diwezata. Ma ve red dibab aj lizerou kenta o devezo ar gwir kenta war ar re all.

Daou staj eil derez d'ar re a zo teski abaoe bloaz pe ouzhpenn, dre lizer pe dre gomz. O daou e feirved sizunvez miz Gouere, unan e Menez-Kamm, egile e Bro-Leon. Plaz d'ar re-mañ ive e staj miz Eost.

Erfin eun taol-esa eo staj ar vachelouriez, ennañ mesk ha mesk liseidi o prien-

ti arnodenn vrezoneg ar vachelouriez. Da genver Pask e Menez-Kamm. Eur strivadenn vraz eo homañ, evel a hellit da weled, e skoaz ar staj bloaz nemetañ a veze ganeom n'eus ket keid 'zo. Skoaz-zellit abanom dre zond da gemer perz evel stajiad, monitour pe gelenner, pe en eur gas deom danvez stajidi. Ma ne rit ket e vo didalvez ha difrouez kement on-eus klasket ober.

## FENTIGELL EUS IWERZHON

War ar maez e-kichen Belfast, karr-tan an div leanez a chomas sac'het souden : echu an esañs. An div leanez, abaf, a yeas da gaout ur peizant protestant hag a c'houlennas digantañ ur banne esañs evit mont en-dro d'ar ger.

Ar peizant a asantas diouzhtu, mes un tammig nec'het e oa : n'en doa nemet ur pod-kambr kozh da lakaat an esañs ennañ. Ma, gwaz a se... E-pad m'edo al leanezed, o div o ruziañ gant ar vez, o leuniañ puñs-esañs ar wetur, setu ma tremen ur Protestant eus ar c'hornad war e velo. Chom a ra badacuet o sellet outo.

« Ne ran ket kalz stad eus ho relijion — met estonet bras on o welout ho peus kement a feiz ! »

# STAD AR C'HEMBRAEG ADARRE



Kembre : un hanter milion a lennerien ?

(Sk. « Y Cymro »)

BREIZ — Pajenn 8

Pet a dud a oar lenn ha skrivañ ar yezh ?

War niverenn miz Du 1973 hon doa embannet ur pennad diwar-benn stad ar c'hembraeg, diwar sifroù niveridigezh 1971, hag a ziskoueze pegen grevus e oa diskar ar yezh. Sifroù all a zo deut er-maez nevez zo, ha diouzh ar re-mañ, n'eo ket koll c'hoazh ar c'hembraeg.

Evit ar wech kentañ ez eus bet goulennet digant Kembreiz hag-eñ e oant gouest da lenn ha da skrivañ ar yezh. Tud zo a lavare ne dalveze ket ar boan, ken izel all e tlefe bezañ niver ar Gembreiz « desket » - se : un digarez a vefe roet e giz-se da dud gouarnamant Londrez. ha d'an holl tud e karg e Kembre a zo a-enep ar yezh, da zilerc'hiañ ar mennadoù evit gwellaat plas ar c'hembraeg er vuhez ofisiel.

Ma ! Sonezh e voe meur a hinj : n'eo ket ken izel-se ar sifroù, pell alese. Diwar 542.425 den gouest da gomz kembraeg, 448.600 a c'hell lenn anezhañ (82,7 %) ha 397.050 a c'hell skrivañ ar yezh (73,1 %). Ken na ra goap ar gelaouenn « Y Cymro » : « E-touezh ar saoznegerien e Kembre, pehini eo kementad ar re a c'hell skrivañ saozneg evit gwir ? »

Hag e kendalc'h : « Ar sifroù-se n'int ket un digarez da chom hep ober netra. Arabat e vefe krediñ n'eo ket ken sirius enkadenn ar yezh hag e oa pa voe embannet statistikou an niveridigezh kentañ warlene... Ar sifroù nevez a ziskouez, n'eus forzh penaos, n'eo ket re ziwezhat evit saveteiñ ar yezh, gant ma vo kroget gant al labour diouzhtu. Bez ez eus tost d'un hanter milion a gaver-lennerien evit pep levr, kelaouenn pe bapereun ofisiel a vez embannet... »

Diouroù leig enbroañ

Un dra a-bouezh ivez diwar-benn kementad ar gembraegefezhrien. Aes eo gwelout e talc'h gwelloc'h ar yezh eget na greder ma keñverier niver ar gembraegerien, n'eo ket ouzh hini poblañs Kembre en he fezh, met ouzh niver an dud ganet e Kembre. Evel ma ouzer, un niver mat a estranjourien, Saozon ar pep brasañ anezho, a zo deut da chom er vro. 26 % eus an dud ganet e Kembre a zo gouest da gomz kembraeg (e lec'h 20 % eus ar boblañs hollek). Setu pezh a gaver evit ar 5 kontelezh eus Gwalarn Kembre :

	% kembraegerien	% ganet e K.	% kembraeg./ ganet e K.
Caerfyrddin	66.5	91.0	73.0
Caernarfon	63.0	72.0	86.0
Ceredigion	67.6	76.7	88.1
Meirion	73.5	75.6	97.1
Môn	65.7	71.7	91.7

Da lavarout eo, 97,1 % eus an dud ganet e kontelezh Meirion hag o chom enni a dalc'h d'ar yezh. Un dra a-bouezh neuze evit dazont ar yezh : n'eo ket ken bras-se niver ar gerent kembraeger a gomz saozneg d'o bugale. Rak, pa seller ouzh ar sifroù a-us, ez eo ret dere-hel kont eus meur a dra ouzhpenn : 1) ma'z eo ken izel ar c'hementad evit Caerfyrddin ez eo aba-

lamour d'un darn eus ar gontelezh da vezan saoznekaet abaoe pell 2) Lod eus ar re « ganet e Kembre » a c'hell bezañ saoznegerien o tont eus rannvroioù saoznekaet (ur C'hembread eus Mynwy, da skouer, deut da chom e Caernarfon). 3) E-touez ar re ganet e Kembre e vez kontet bugale ar Saozon evel just.

Sifroù ar golonenn diwezhañ a ziskouez ez eus bet ur c'holl, met e talc'h Kembreiz d'o yezh dre vras, hag e teskont anezhi d'o bugale. Kementad ar gembraegerien a zo aet war ziskar eus 75 % da 65 % etre 1971 e kontelezh Moñ, e-pad ma tiskenne kembraegerien e-touezh an dud ganet er gontelezh eus 95 % da 92 % nemetken.

An holl dud a oa o chom e Kembre da vare an niveridigezh a zo bet kontet evel « Kembreiz ». Touristed, beajourien-koñvers, ha studerien : e skolveur Aberystwyth (Ceredigion), da skouer, muioc'h eget an hanter eus ar studerien n'int ket Kembreiz, ur 15000 bennak anezho. A-hend-all, bez eus kembraegerien war o studi e Bro-Saoz hag ouzhpenn-se, ur 100.000 bennak a gembraegerien divroet.

Pezh a Iakfe ar yezh en arvar e vefe neuze kentoc'h an divroañ hag enbroañ ar Saozon.

## BARZHONEG

An den a oa kouezhet war e grabanoù  
Toull e loeroù ha pase fall e voutoù  
Ur chupenn mezhus da ginnig d'ar pilhaouer  
Ur tog heñvel ouzh hini ar beorien-all dre gêr  
Sebeliet bev, e zalc'h war e galon  
Ur voutailh goull e giz ur groaz  
Pa 'n'eus netra ken war an douar evidomp  
Noazh, e taolez da zell mantret ouzh da vatezh  
Krenañ rae e zorn all 'klask an aluzen  
N'en deus oad ebet ar paour kaezh den-se  
Pell 'zo n'eo ken ar bed-mañ nemet e skeudenn  
Ha n'eus ken nemedon da sellout outañ

Grumuchañ a ra pep hini dirazañ  
« Paz poa arc'hant 'talc'hes anezhi evit lonkañ  
Da wreg, da vugale a chome hep bara »  
Truezh ouzhit ne glaskes ket bremañ.

Ar marv a zo koulskoude tost outañ  
Liv al lianed a zo warnañ  
Tanañ a ra e c'hourlañchenn disec'het  
Ha memes tra dorn ebet ne vo astennet.

Marteze ez aio kuit war al loar gann  
Devet e vo e zaoulagad ha diboaniañ  
Marteze ur diwezhañ gourlañchedenn  
En defe sikouret anezhañ hep kaout pedenn

Marteze e kasfec'h anezhañ dreist an noz bras  
Echu e vo dezhañ amzer ar penn baz.

Pa n'eus netra da goll nemet e groc'hen fall.  
Ha ma rafe ur mousc'hoarzh war hent ar bed all ?

Sellaz ! Kemer ha stag anezhi ouzh da benn  
Hag ev, ev, 'vel ur soner war an dremen  
E zorn war an delenn, selaou ar requiem  
Selaou c'hoazh ar c'henavo da virviken.

Suzian.

# BUHEZ E LEC'H ALL ?

Abaoe un nebeut mizioù e vez kaoz adarre eus an « OVNI » pe « UFO », pe « pladigoù nij » mar kirit.

Ken luziet eo an traoù, ken disheñvel an istorioù a gaver un tammig e pep lec'h ma'z eo diaes-tre gouzout e pelec'h emañ ar wirionez. E-touez ar re ouizieki ez eus tud diseblant pe na gredont ket er « pladigoù-nij » (ar pep brasañ anezho), ha reoù all a gred enno. Meur a c'houlenn a zo e gwirionez.

## PETRA SONJAL EUS AN TESTENIOU ?


Siwazh, e-mesk an dud a lavar o deus gwelet « pladigoù-nij » ez eus ur bern farserien... Hemañ en deus gwelet tudigoù glas a glaskas mont e kaoz gantañ en ur yezh dianav (evel just). Henezh a zo bet kaset e-barzh o fladig gant tud « e-mêz douar » hag en deus graet anaoudegezh eno gant ur goantenn a blac'h « e-mêz douar » ivez : ar bugel a vo ganet war ur blanedenn all. Fotoioù a zo bet graet : peurlvuiañ ne weler nemet poentoù goulou displann, a-wechoù, er c'hontrol, ur « pladig » heñvel ouzh ur stouf dour mineral. Hervez un enklask ofisiel bet graet gant an Amerikaned, 99 % eus an testenioù-se a c'hell bezañ diskleriet aes-tre : planedennoù (evel Venus da skouer), baloñsoù, satelitennoù, ha traoù all c'hoazh, naturel an holl anezho. Evit ur c'hemen-tad bihan, avat, n'eus ket bet kavet diskleriadur ebet. Arabat e vefe krediñ evel just ne c'hellfe ket bet kavet unan, gant ma vefe resisoc'h an testenioù.

En desped da se, ur bern tud a gred ez eus « pladigoù » o nijal a-us d'hon fenoù.

## BUHEZ HA SEVENADURIOU E LEC'H ALL ?

Eno emañ an dalc'h. E-doug 10 vloaz, un toullad aostronomed er Stadoù-Unanet o deus kaset galvoù dre radio war-du ar stered, hag o deus selaouet outo da welout ma ne resevent netra. En aner e voe dispignet yalc'had ar program « Ozma » : 10 vloaz ne oa ket awalc'h marteze, hag e vefe ret selacuiñ e-pad ur pennad hi-roc'h. Ne sinifi ket n'eus buhez ebet e-mêz an douar.

N'eus prouenn ebet betek hiziv e c'hell ar Vuhez kaoz stummoù disheñvel diouzh hini a gaver war an douar. Tuet e vefe ar re ouizieki da grediñ ivez ez eo dam-henvel ouzhibo tud speredek (ma'z eus anezho) er bedoù all. Ma'z eo gwir kement-mañ (ha n'eus prouenn ebet ne vefe ket) ne c'heller kaoz buhez (ha tud speredek) nemet war blanedennoù « klouar » evel an douar : e-barzh sistem an heol ez eo re yen Saturn pe Jupiter, ha re domm Venus pe Veurzh da zerc'hel buhez (nemet stummoù izel-tre marteze, met n'eo ket ar re-se a c'hellfe dont da welout ac'hanomp gant pladigoù !). Daoust hag ez eus planedennoù e lec'h all ? Krediñ a reer hiziv ez eo bet « krouet » an heol, asamblez gant ar planedennoù en-dro dezhañ, n'eo ket dre zegouez (ur steredenn all he defe skrapet danvez digant an heol en ur tremen en e gichen) met dre galedadur ur goumoulenn idrojen : un dra normal e vefe neuze. Ne c'heller ket gwelout planedennoù er-maez eus sistem an heol, met posubl eo « divinouet » anezho. Tost deomp, 20 bloavezh-goulou, div steredenn a dro an eil en-dro d'eben, ha gwaret eo



Etrezek douarou all...

o finvoù evel ma vefe un « dra » all, kuzh en o c'hichen. Ur blanedenn e vefe.

Ma kavomp ur blanedenn e-kichen an div steredenn tostan deomp, neuze e c'heller kredin ez eus ur bern anezho e-barzh ar c'halaksienn. Pet anezho o deus planedennoù « klouar » ? War bet anezho ez eus buhez ? Daoust hag ez eo ganedigezh ar vuhez war an douar-man un dro normal pe a zo c'hoarvezet nemet dre zegouezh ? Ne c'heller ket respont d'an ampoent : ma vefe kavet buhez, ken dister ha ma vefe, war blanedennoù all hor sistem (Meurzh da skouer) e vefe aesoc'h respont. Bete vremañ n'hon eus kavet netra. Ha pet anezho o defe ur vuhez « speredek » ? Sevenadurioù ? Pegeit e pad ur sevenadur ? Den ne oar.

En desped da se, aostronomed o deus jedet e tlefe bezañ war-dro ur milion a sevenadurioù e-barzh ar c'halaksienn.

## DAOUST HAG E C'HELLOMP KAOUT DAREMPREDOU GANTO ?

Ur milion a seblant bezañ un niver bras. Arabat e vefe disoñjal ez eo ec'hon hon galaksienn : kant mil milion a steredennoù a zo enni. M'hon eus c'hoant da skouer mont da glask sevenadurioù all, e vefe ret en arak gouzout e pelec'h klask. Ken aes eo kavout ur sevenadur er c'halaksienn ha kavout ur spilhenn war al Lev-Traezh... Cuzhpenn-se ez eus kudenn buanded ar goulou. Hervez lezennoù Einstein, ne c'hell ket un dra bennak er bed a anavezomp mont buannoc'h eget 300.000 km/eilenn. Pell emaoamp hiziv diouzh ar gont, peogwir ne ya hor fuzennoù « nemet » betek 30.000 km/eur. Daoust ha gw'r eo lezennoù Einstein avat ? Ma ne vefent ket, eme un den gouizieki, neuze ur bern mekanikoù nukleel ne yafe ket en dro... War a seblant, n'eo ket posubl mont buannoc'h eget ar goulou. Ma fellfe da aostronoted mont da weladeniñ ar c'halaksienn, zoken ma yafent ken buan hag ar goulou, e padfe o beaj 80.000 bloavezh betek penn pellañ ar c'halaksienn...

Setu an harzhoù a zo dirazomp. Hag a zo dirak ar sevenadurioù all ivez, ma'z eus anezho. Karc'hariet omp e-barzh sistem an heol, bete gouzout.

## PERAK E VEZ GWELET « PLADIGOU » NEUZE ?

Aon en deus bet Mabden a-viskoaz ne vefe e-unan penn war an Douar. Gouzout a ra pegen gwan eo, klask a ra bezañ gwaredet. Ouzhpenn-se ez eo bet atav o klask displegañ ar bed : nemet er c'hantved diwezhañ n'en deus ket kredet e c'hellfe diskleriañ holl misterioù ar bed, gant e skiant dezhañ e-unan. Evit meur a zen, « Doue a zo marv », met ne c'heller ket tremen hep doueed...

Ur « relijion » nevez a zo en em skingnet e-touezh tud zo er bloavezhioù diwezhañ : hini ur Sevenadur Kozh, uheloc'h eget hon hini, a vefe bet war an douar milvloazioù ha milvloazioù a zo ; hini sevenadurioù e-mêz douar a vefe deñt d'hon gwelout meur a wech, hag a dalc'h d'hen ober, hag o defe kaset Mabden war-bouezh e zorn, war hent ar sevenadur. N'eo ket gouest Mabden da vont war-raok ma ne roer ket un tamm skoazell dezhañ, setu pezh a gred tud evel Pauwels ha Bergier. Ar sevenadurioù e-mêz douar a vefe bet ur seurt « Deus ex Machina », kelennerien m'ho peus c'hoant. Penaos e oa deut abenn ar gelennerien-se da grouiñ o sevenadurioù dezho, se zo un afer all... Frealzus eo ur seurt kredenn avat : ar bitekantroped a zo ac'hanomp, armoù danjerus e-leizh en o daouarn, a vefe diwallet diouto o-unan gant « tud » uheloc'h, firoc'h, skoachet en ur c'horn bennak pe brest da ziredek d'an daoulamm ma c'hoarvez da Vabden klask en em zistruj.

Petra a zo a-dreñv ar gredenn-se ? Feiz, n'eus ket kalz a dra. N'eus prouenn ebet ez eus bet ur Sevenadur Uhel er milvloazioù tremenet. Klasket ez eus bet dastum an holl traoù misterius a vefe bet savet gant ar sevenadur-se : leur templ Baalbek er Liban a vefe ul lec'h-douarañ evit listri an dud e-mêz douar ; e-barzh ar Vibl e vefe meneget gweladennoù an dud-se, an « elohim » pe an a elez... betek ar piramidennoù a vefe kuzhet enno ur skiant bet kollet abaoe.

(da heul p. 10)

# BUHEZ E LEC'H ALL ?

Aes-tre eo diskar seurt menoxioù. Lavaret ez eus bet da skouer e oa bet savet statuennoù Enez Pask n'eo ket gant ur sevenadur « izel » awalc'h evel hini ar Bolinezioned, hogen gant ur sevenadur teknikel. Evit sevel ar statuennoù en o sav, e vefe ret kaout mekanikoù... Pell emeur eus ar wirionez ! Statuennoù Enez Pask a zo bet savet hep tamm mekanik ebet, dre ma'z int graet e tuf, ur maen volkanik skañv-tre (hag aes da venañ, war ar marc'had). Evit ar piramidennoù, klaskit c'hoari gant sifrou mentou an tour Eiffel pe an Empire State Building hag e kavoc'h a bep seurt traoù : pegeit a zo etre an Douar ha steredennoù Centauri da skouer : evit kontañ e c'hellit implijañ bloavezhioù-goulou, « li » ar Chinaiz pe vuzulioù Astekiz pe tud Borneo, evel just. Evit pezh a sell ouzh ar mojennoù (ar re a gaver e-barzh ar Vibl, pe vojennoù n'eus forzh pe bobl war an douar) e c'hellit troc'hañ, drailhañ an testennoù, adrenkan anezho diouzh ho c'hoant, hag all...

Daoust hag emañ ar gwir gant Jung pa lavar e wel an dud pladigoù-nij dre ma fell dezho gwelout anezho ? Er c'hantvedoù diwezhañ o defe « gwelet » tasman-toù pe ar Werc'hez... Posubl eo. Gouzout a reer bremañ (war-lerc'h dizolaadennoù ar « Mariner ») n'eus ket a ganolioù war Veurzh. Koulskoude, e derou ar c'hantved,

e oant bet « gwelet » gant astronomed zo.

Arabat e vefe lavarout groñs neus ket a sevenadurioù all er-maez an douar, ha n'int ket deut biskoaz amañ : ur vartezeadenn n'eo ken, hogen nac'h anezhi na vefe ket gwelloc'h eget kredin start enni.

## SKINGOMZ HA SKINWEL

Marv Alan ar Berr

Kelou hon eus bet eus marv hor mignon mat Alan ar Berr, ezel « Skingomz ha Skinwel » adalek ar penn kentan. Genidik eus Gwaien ha bet kelenner e liseou micherel Landerne ha Brest, Alan ar Berr a oa abaoe un nebeut bloavezhioù karget e enklaskou gant ar C.N.R.S. Edo dres oc'h echuin un dezenn diwar-benn an anvioù pesked e brezhoneg a zlee souten dirak Keyrenn al Lizherou e Brest.

Kalz a enklaskou en doa graet ivez diwar-benn an anvioù brezhonek war aodou Breizh evit servij kartennoù mor ar verdeadurezh.

Ra zegemero an Itron ar Berr e wreg, a-gevret gant e vugale, hor gourc'hemennou kalonekan a genganv.

Afer Charlez ar Gall

Hor C'hevredigezh a zo bet krenn a-du gant Charlez ar Gall dirak strizhder an O.R.T.F. o virout outan rein er skinwell en o yezh d'ar Vretoned (en ur c'hasadenn 90 eilenn, mar plij !) keleier bet embannet dija gant nouspet kaze-tenn.

Despet hon eus ez eo bet distrujet dezeg Tredudon gant an F.L.B., hogen piv eo an hini kablusan en afer-se ma n'eo ket ar gouarnamant gall ? Daoust

hag e ra an disteran stad eus Gwirioù an Den en hor c'henver pa ne fell ket dezhan rein ur plas dereat d'hor sevenadur er skolioù koulz hag er skin-gomz ha skinwel. Ni a zo a-enep ar feulster hogen daoust ha n'eo ket ur feulster eus ar re washan ar renadur digar lakaet warnomp gant ar gouarnamant gall en despet da c'houlennadegoù diniver hor c'huzulioù departamant ha d'ar goulenadegoù ken diniver all, an hini diwezhan gant tremen 150 000 sinadur ?

Evit pezh a sell ar c'herioù dourbeuzet daoust adarre n'eo ket kablus ar re a zo tispenn en un doare ken dibocll kleuzioù hor bro oc'h aotren evelse an dourioù da ruilhañ hep harz ebet betek an draoniennou ?

## DEK LUR NEVEZ EVIT AR BRIZONIDI

- Ho pet kalon, rak :
- Hor bro a vo trec'h,
- Hor pobl a vo trec'h,
- Hor yezh a vo trec'h,
- Frankiz a vo trec'h,
- Justiz a vo trec'h,
- Mab-den a vo trec'h, un deiz !

Erwan Brezeleg (Studier e Naoned)  
Evit ar brizonidi, kas an arc'hant da :  
P. Roy, CCP 244 83 Roazhon.

BREIZ — Pajenn 10

